

SANTEZ BARBA BENNIGUET,  
INTERCREDIT EVIDOMP, NI HO PED.

## HISTOR EUS A VUEZ

### SANTEZ BARBA,

*Pehini zo maddaveza reclamet dioc'h  
ar gurun ha dioc'h ar maro subit.*

Var an ton ordinal.



**M**E ho suppli , compagnuez ,  
Da selaou cana ar Vuez  
Da zantez Barba biniguet ,  
A zo a neverz composet.



Er bloa daou c'chant hac anter-cant ,  
Dindau Maximin an tyrant ,

— 2 —

Demeus a nobianç bras meurbet ,  
E Nicomedi voe ganet.



He zud a voa idolatret  
A gorf , a galon , a speret ;  
He zad d'ar gristenien garo ,  
A r   o laqat d'ar maro .



Mes ar verc'hez Santez Barba  
Nemet Jesus ne gar metra ;  
Christenez voa evit certen ,  
Ha souten vras d'ar gristenien .



Oc'h e beza caer meurbet ,  
Gant eur prinç bras voe goulennet ,  
Hac e voa gant   deziret  
Evit e c'haouet da bried .



He zad a gommandas dezi  
Accepti souden ar parti ;  
Mes hi a respontas neuze  
Ne raje bi  n an dra-ze .



O sònjal galloud he dompti ,  
 Gourc'hemen a eure dezi  
 Antren en eun tour er prison ,  
 O clasq he renji d'e rëson.



Eno e cåvas Doue e zad  
 A ranversas gant eus tol troad :  
 Da Jesus-Christ en em roas  
 Corf hac euc a galon vad.



Ar c'homsec'h-mañ a levarez :  
 Jesus a zo maro er groas ,  
 Voui a ràn d'ho Majeste  
 A galon va virginité.



Neuze souden , dæ viraci bras ,  
 Sin ar Groas qen don a c'havras  
 Gant e bis en eur men calet ,  
 E effaci ne allet qet.



Goude-ze e commandas prest

Ma vize great tri brennest  
Evit enori an Drindet  
A gare a galon barfet.



He zad an dra-ze pa velas ,  
Ouz ar Zantez a c'houleñnas :  
Petra sinifi qementse  
Zo grêt dre hoc'h autorite ?



Evit enori an Drindet  
O ober am eus commandet :  
An Tad , ar Mab , ar Speret-Glan  
A zo tri ferson en unan.



Tri brennest zo var ar prison ;  
Un Doue zo en tri ferson ;  
Mes va entent na ellit qet ,  
En defot beza badezet.



Va zad , pa em eus commandacet ,  
E livirin dêc'h eur secret :  
Credi a ran en Jesus-Christ ;  
Illa droug a ran , ma zoc'h-bu trist ?



Souezet oomp ouz ho q  elet  
 Entrezoch', c'houi, idotatret,  
 Ouz ho q  elet oc'h adori  
 Doueou gr  t gant meia ha pri.



Me ne r  n q  et a estim bras  
 A Jupiter nac a Battas;  
 Satan en deus o invantet  
 Evit coll a: boyti eus ar bed.



Eur re zo Egyptianet,  
 Hac a ador ar serpentet,  
 Ispicial ar chrocodil,  
 A zo var dro rivier au Nil.



Darn all a ador un eujen,  
 Eur seurt all a bed un azen,  
 Hac an dud a Alexandri  
 A ador ar chaz hac ar c'hi.



Etrezomn-ni oll, Christenien.

— 6 —

A ador un Doue mui qen ,  
 Pehini a zo an Autrou  
 Eus an douar hac an ênvou.



Ho pet , balamour da Zoue ,  
 Ho pet truez ouz hoc'h ene ;  
 Lest al lezen-ze milliguet ,  
 Petramant e viot daonet.



He zad neuze pa e c'hlêvas ,  
 Dre goler vrás e respontas :  
 Effrontet out , en assuranç ,  
 Comz er fêçon-ze em presanç.



Ia , ret eo , assurément ,  
 E pez-te collet da sqiant ,  
 Adori un den zo crouquet  
 Evit crimou hep mar ebet.



Va zad , laqet voa d'ar maro  
 Gant ar judevien en e vro ;  
 Mes , va zad , ne ententit qet ,

Penevert se e voamp collet.

00006



Da ennes en deus va frenet,  
 Va zad, ez on-me demezet;  
 Brassoc'h mestr eo assuramant  
 Eguet Maximin an tyrant.



Ennes en deus grêt a metra  
 Qement a velomp er bed-mâ,  
 Hac a rei sur plaq da repos  
 D'ar Gristenien er Barados.



Mes ar re ne gredit enaa,  
 Pa zeuyo da varv ar bed-mâ,  
 O c'hondaono d'an tan grissas;  
 N'em deus poan a ve qen divlas.



En eur goler ec'h antreas,  
 E gleze diouc'h-tu a dennas;  
 He zreuzi a fellas dezân,  
 Mes Doue a viras ountân.



Redec a eure var he lerc'h ,  
Mes eur roc'h güenn evel an erc'h  
Evit he c'honservi antier  
En em digoras dre'n anter.



Goude-ze e voe qemeret ,  
Ha gant qerden rust amaret ,  
Ha d'ar president Marcian  
E zad el livras e-unan.



Ar president , pa e güelas ,  
Ouc'h ar Zantez a c'houennas :  
Din-me prontamant livirit  
Peseurt Doue a adorit.



Credit-hu certen , President ,  
Christenes oun certenamant ;  
Ha ne zeus nac aour da tourmant  
A else chench va zantimant.



Ho toueou zo hep gallout

Na da ober na mad na droug ;  
 Rac-se e zeo bras ho fazi  
 Laqat ar bobl d'o adori.

000

Soûezet bras oun-me ganeoch' ,  
 Va merc'h , truez am eus ouzoch' ;  
 Qüittait ho lezen afo ,  
 Pe autramant ez och' maro.



Mar qirit chench a zantimant ,  
 Me royo dêch' aour hac arc'bant ,  
 Nac eur Prinç bras evit pried ,  
 Ho caro a galon barset.



It gante en perdition ,  
 Jesus eo^va zeazor güirion ;  
 Bras ve an den ambitius ,  
 Ma na ve contant a Jesus.



E zad neuze , pa he c'hlèvas ,  
 D'ar President a lavaras :  
 Autrou President , grit justic ,

Rac homàn zo leun a valiq.



Rac-se grit justiq , me ho ped ,  
Ha dezi ne faziet qet ,  
Pe me scrifo a dra certen  
Ez oc'h evit ar Gristenien.



An Impalaër dre e arrêt  
A ordren ma vezò losqet ;  
Mar faziit , credit ervat  
Ez oc'h assur da goït ho stat.



Neuze souden voe divisqet ,  
Ous eur pillyer e voe staguet ,  
Ha dispennet gant scrifellou ,  
Ma coeze he c'hig a beziou.



Un horrol bras e voa güelet  
He goad virginal o redec ,  
He ne voa den , bras na bian ,  
N'e voeljont oll guitibunan.

\*

Goude d'ar prison voe casset,  
 Er bassefos e voe lajet,  
 O clasq dont a ben anezi,  
 Autramant e disesperi.

\*

Neuze soudan voe bisitet  
 Gant Jesus-Christ, Salver ar bed,  
 Rehini, en eur douch outi,  
 A eure salo anezi.

\*

Barba, va merc'h, ho pet courach,  
 Rac ar President a arrach  
 Ouzoc'h, en defot va c'huittat  
 Da adori Doue ho tad.

\*

Jesus, n'am abandonait qet;  
 Mar plich ganêch, va sicouret,  
 Ma ellin souten constamant  
 Evit ho cloar pep seurt tourmant.

\*

An eol, al loar hac ar stered

A ve qent mil güech distrujet  
Hepgen ma fazien deoc'h  
Ha n'am be sourci ac'hanoc'h.

◆

An eil ternos e voe tennet  
Evit beza interrojet ,  
Hac e voe roet dei da choas  
Renonç , pe souffr tourmanchou bras.

◆

Hi , fortifiet gant Douse ,  
Prest a respontas d'ar Roue :  
Lavaret em eus déch dija  
Va zantimant , hep naç'h netra.

◆

Birviqen james ne chenchàn  
Ar pez a lavarin bremàn :  
Va Jesus a zo em c'halon ,  
E varo hac e bassion.

◆

Hac a vezò da virviqen  
Evit nep glac'har , nep anqen ;  
Rac-sc , tyrant , depech afo ,

Deus d'am c'hondaoni d'ar maro.



An tyrant-se gant e arrach  
 A laqas dispen e bisach  
 Hac ar c'hig divar e c'hostou,  
 Gant cribou houarn ha scifellou.



Gant goulaouennou alumet  
 E gouliou a voe rostet,  
 Hac e diou vron a unanou  
 Distaguet gant razouerou.



Tennet voe neuze en noaz beo,  
 Goloet hepken gant e bleo,  
 Gant cur goabren güen meurbet  
 E goloas Salver ar bed.



Var e fenn an toliou morzol  
 A scöe gant quer bras horol,  
 Ma crene memes ar pave  
 Gant an toliou a receive.



Pa veljont n'allent qet outi ,  
O deus sònjet e c'hondaoni  
D'ar fin da vez a dibennet  
Var eur chaffot a voe dresset.



Ar bourreo gant trues outi  
Ne zibenue qet anexi ;  
E zad , bourreo ar c'hruella ,  
En em offras d'e dibenna.



Neuze ec'h eure eur beden  
Da Zoue vit ar Gristenien ,  
Ma pliche da Zalver ar bed  
Accordi dezi eur reget.



Goulen a eure ouz Doue  
Evit piou benac m'e fedje  
Ne varvo qet subitamant  
Abars receeo ar Sacramant.



Un El neuze' apparissas ,

Ha d'ar Zantez a lavaras :  
 Barba , n'ho ped douetanç ebet ,  
 Accordet eo dêch' ho reget.

000



Eur gurunen a c'hloar a zougân  
 Bremâ-souden d'ho curunân ,  
 Rac prest oc'h da vont da velet  
 Doue , ar Zent ha Sentezet.



Eun tol cleze digant e zad  
 A zispartias evit mad  
 E c'horf eürus diouz e fen ,  
 Hac e lamas a bep anqen.



Eun tol curun demeus an eê  
 A foueltras e zad goude ze ;  
 Qement all evit paemant  
 A c'hoarvezas gant an tyrant.



Ebars en calz eus a vroyou  
 Eus dediet dei Chapelou ;  
 Mes unan zo dreist pepini

A interess ac'hanomp-ni.



An drede deiz a viz Gouere  
E ve bras ar solanite  
E Santez Barba , en Rosco ;  
Eno e ve tud a bep bro.



Pedomp-hi eta , Bretonet ,  
Ma vimp dre e græ preservet  
Demeus ar guran hac an tan ,  
Ha da savetat peb-unan.

FIN.

